

KONT DIN

mil nozvezh hag unan

AN DEIZ MA NE VO KET MUI KOLLET O DEIL GET AR GWEZ

Hervez ar pezh a lârer amañ, gwerso bras zo e oa tolpet gwez koadoù ha troardroioù minotennoù aod hag inizi ar Mor Bihan en ur c'huzul, un deiz ag an diskaramzer.

« Er c'houlz-mañ ag ar blez e vez berroc'h an deiz evit an noz ha n'hon eus mui hon gwalc'h a splannder evit magiñ mat hor c'hefioù hag hor brankoù uhelañ. Ma c'hellehemp diwiskiñ hor saeoù deñiek e vehe aesoc'h dimp gouarniñ hor blein uhel betek an nevezamzer ar-lerc'h » a lâras an dervenn a oa e penn ar vodadenn. Ar faouenn, an onnenn, ar vezvenn ha razz ar gwezha a oa tolpet a intentas furnez an dervenn hag a-unvouezh e savjont a-du get he c'hinnig.

Ar sapinenn ne soñje ket mem mod.

« Ma tivizomp razz lemel hon deil en diskaramzer, get piv e vo goudorenned evned hag ostizion ar c'hoadoù tra ma vez rielloù kentañ ar gouiañv e pizenniñ ar brug diwezhañ hon enezeier hag enezennoùigoù ? Mard eo mat deoc'h e kinnigan deoc'h menel glas a-hed ar blez. »

« Derc'hel a ri da chom skornet da deil ma 'teus c'hoant, mes ni a welo mat piv a c'hoarzh e-leizh he deil pa vo daet an nevezamzer » a eilgerias an dervenn. Setu perak, a-c'houde an deiz-se e chom glas ar sapinenn, adal nozioù abred an diskaramzer betek deizioù an nevezamzer karg a splannder hag a-benn d'ar gouiañv yen ar douar Vreizh.

O dalc'husted hag o madelezh e-keñver annezidi ar c'hoadoù o lak, hiziv an deiz c'hoazh, da vout degemeret mat en tiadoù da noz an Nendeleg, Bourriñ a ra an dud e vamiñ doc'hte pa vezont kinklet get bouloù gwer kanevedennek, garlantezoù ha neudennoù, goulaoennoù laket get evezh hag avaloù-pin o frond koadeier, tra ma astenn ar re vunut o daouarn dibasiant a-benn endevout o lod a hirsukrennoù pe bara-mel. Stad a vez er gwez-sapin.

Mes soñjit 'ta un tamm ma vehe fin d'an istor kaer-mañ !

« Ha bout ma vourran e welet get gred hor c'hêrioù sklêrijennet e-pad ar gouelioù, ne gomprenan ket perak an diaoul e ranker troiñ an nozioù e deizoù a-hed ar blez ? Ha bihanaet e vez hon strafuilhadennoù a gozh pa vez sklêrijennet hon nozvezhoù er c'hêrioù hag ar maezoù ? An aon dall-se a gresk etre doub-deiz ha doub-noz, d'ar pred ma vann an natur he skeudoù ha ma komañs hon ijin dirolliñ. »

Teurel termen d'an noz hag endevout c'hoant da welet ken sklaer evel an deiz atav, n'eo ket ur soñj ag ar choaz » a lâras ar sapinenn e fulor.

« Efedoù fall a c'hell bout da-heul :

- Spontet e vez ar papilhoned hag an amprevaned paket edan gouleier-tan lampoù hor straedoù hag hor ruioù e-raok bout lonket re aes get loened noz olbouedet ar o api.
- Berraet e vez kejadennoù amorous ar skignaned dioueret a selinadennoù hag a sonadegoù da serr-noz.
- Mut ha diviget e ta ar moulc'hi hag ar boc'hruzged da vout ar-lerc'h bout bet e tic'hargatenniñ noz-deiz hag a-leizh-korzenn betek skleuroù kentañ an deiz.
- Ar maligorned hag o c'henouenni, ken brudet arall da vout digas, a chom kousket ha forset da vankiñ da zebriñ. « Ar c'houked zo hanter voued » ne dalv ket mui kalz a dra d'al loened gourhampl-se hag a gustum dihuiniñ da noz ha durc'hiñ stank-ha-stank da skleur al loar ar glask kreskennoù tener pe deil kouezhet ar al leur e-doug an deiz.
- Daleet e vez degouezh an evned tremeniat daet a bell vro da glask repoz deleet mat dezhe ar ar c'hlerennoù, ar graeoù hag ar glazidegoù mager zo er Mor Bihan Gwened.
- Diroudet e vezont dre ma ne welont ket Hent-sant-Jakez en oabl splannaet betek re get gouleier ar c'hêrioù pa nijont a-uc'h dezhe.

Gwashoc'h zo c'hoazh, dre forzh sklêrijenniñ an nozioù e vo gouarnet o deil da viken get an derv, an onn, ar bezv... ha donet a ray gwarizi, foëñvaj, argad ha sach-deil... da drubuilhiñ unvaniezh hor c'hoadoù. Neuze, razz asambl hor bo keuz ag an amzer ma oan un ostiz doujet er filajoù. » a lâras ar sapinenn en ur hirvoudiñ.

• **Ac'hanta, enaouomp ar stered en-dro ! Ha n'ankouaomp ket ar c'hrennlavar kozh ha fur ken gwir arall c'hoazh : EN NOZ E TAPER AR SILIOÙ.** » a lâras ar sapinenn evit kloziñ.

Anne JACOB

Strewerez hengounioù ag ar Mor Bihan gredus da « Talvoudoù ar Park natur rannvroel »

SANTIÑ AN NOZ MOD-ARALL...

Testenioù get Catherine Rio ha Véronique Langlo ag ar gevredigezh TYPHLO e Gwened

« Da noz e vez ankeniet an dud fall o gweled rak chom hep gwelet pe chom hep mui gwelet netra. Aon o devez rak em adkavouet en noz-du, ha bout ma n'em adkaver ket en deñvalijenn pa ne weler ket mui. Ha ne vehe ket aon rak koll o merkoù da vat, muioc'h evit em adkavouet en deñvalijenn ? »

« Pa vezan-me en ul lec'h anavet ganin da noz e kontan muioc'h ar merkoù kinestezek, ar c'hleved, ar stokiñ a-vras. Da noz e santan muioc'h an tolzennoù, evel ar magerioù, aesoc'h e vez din mont-dont, nebeutoc'h e valean a-dreuz. An endro, an aergelc'h, an aer, pep tra zo disheñvel. Me 'gav genin e vez kenfinet muioc'h ar pezh zo en-dro din da noz ha neuze e c'hellan santout muioc'h a draoù dre an divskouarn, an aer ar ar c'hroc'hen. A-benn an taol fin e tremen pep tra dre-se, dre al leur, an trouzioù... Dre ar sonioù em eus desket da vat a-ziar ul lodenn ag ar bed abaoe ma ne welan ket mui. Evidon-me bremañ emañ unan ag ar skiantoù pouezusañ ma liamm doc'h ar bed, doc'h bed an dud ha doc'h bed an natur ha kement zo. »

« Ar gouleier artifsiel a c'hell bout mat evit bihanaat an dañjer, evit aesaat ar vuhez. Mes evit traoù zo e c'heller em soñjal hag ezhomm-bras zo d'ober anezhe pa vez noz er-maez. Me a chal emañ diazezet hor c'hevredigezh a-bezh evel-se ha marse e vehe brav disteurel ar fesonioù-se. Ha rekis-bras eo din mont d'ober preadennoù da g eur noz ? Ha n'hellan ket em zibab mod-arall ? Sur a-walc'h e c'hwitan ar ur mare a beoc'h evit ma yec'hed hag evit distroiñ d'ar vammenn a-benn an taol-fin ? Hon lakat a ra an noz da soñjal ennomp-ni hon-unan. Da noz e ver e-unan gwall lies, en arbenn d'an unan. Ha marse a-walc'h e c'hell bout digoret dorioù disheñvel dimp ar ar bed ma kemerer amzer da chom a-sav pa vez e nozat. A-benn neuze e vez posupl gober anvedigezh get e endro en ur mod arall hag em anavouet e-unan ar un dro. »

